


# bremañ



**Embann  
ha  
labourat  
evit  
Breizh**

**Distro-Skol  
ar skolioù  
brezhonek**

**Celtomania,  
Breizh e  
Naoned**

## Distro-skol ar c'hentelioù-noz

### Gwipavaz

Gant "War roudoù ar Gelted" e kreizenn dudi, stradaed Brest. Ul live. E vit enskrivañ : Yann Vadezour LAGADEC : 98 84 66 28.

### Plouvien

E ti Skolig al Louarn, ul live. Titour digant Skolig al Louarn, BP 13, 29860 Plouvien, plg. 98 40 00 64.

### Gwitalmeze

Gant Skol Diwan e sal-kêr Plougin. Tri Live. Titour digant ULAMIR : plg. 98 48 15 66.



### Landerne

Gant Skol Diwan e ti karter Kergreis. Daou live. Titour digant Philippe OILLO : plg. 98 85 20 48.

### Plougastell

Gant "An Daoulamm" e skol an Dachenn Foar, bourk Plougastell. Ul live. Titour digant Denez BAYARD, plg. 98 40 53 87 pe 98 40 30 79 pe c'hoazh 98 04 22 79.

### Plouzane

Kentelioù brezhoneg a vez e Brest hag e Plouzane, aozet gant ar gevredigezh "Kanevedenn". E vit gouzout hiroc'h, pellgomz d'an 98.26.10.37 pe d'an 98.80.26.71

### An Ospital

Kentelioù brezhoneg a vez en Ospital-Kamfrout, aozet gant ar gevredigezh "Ar Froud Birvidik". E vit gouzout hiroc'h, pellgomz d'an 98.20.02.69 pe d'an 98.25.88.28.

### Brest

Evel bep bloaz e vo skol vrezhonek en Oaled Sant Erwan (Kreizenn Sevenadurel gristen). Daou rumm kentelioù a vo : evit an deraoudi hag evit ar re a oar un tamm. Digoust eo ar skol-se ha graet e ti an Oaled 28 Stradaed Charles Berthelot e Brest (Karter Sant Varzhin).

### Becherel

Emañ Kevredigezh Savenn Douar o klask ur c'helenner war ar brezhoneg e Becherel (30 km eus Roazhon, 20 km eus Dinan). Kentelioù a zo bet dija warlene gant ur strollad bugale, daou strollad tud gour (d'eraoudi ha live unan). Pezh a rae war dro 12 den en holl. Tud all eus ar vro a zo dedennet evit deskin.

E vit en em ginnig : Savenn Douar, 4 Plasenn Jehanin, 35190 Becherel, plg. 99 66 73 43

### Rostren

Tri live a gentelioù brezhoneg a zo e Rostren. Graet e vez ar c'hentelioù e salioù ar Gael, Stradaed ar Morbihan. Goulenn titouroù digant Yann TALBOT, presbital Rostren 22110 plg. 96.29.01.55. Kroget eo bet ar c'hentelioù d'al Lun 20 a viz Gwengolo.

### An Aibre

Digoret eo skol-noz Kerlenn Sten Kidna abaoe dibenn miz Gwenholon. Evel arfañse e kaver da zibab etre pevar live disheñval (hervez barregezh ar skolid). Kentelioù da 6e30 pe da 8e30 goude merenn e sal ar Gerlenn en Alre (a-dal al Lun betek ar Gwener). "Klub ar vrezhonegerion" : kentañ sadorn ar miz, 8e30 goude merenn.

En tu arall d'ar c'hentelioù sizhunik e vez kinniget tri staj berr (sadorvezhioù d'endev) e-pad ar blezad. Skodenn (blezad) : 100 lur.

Titouroù e tenniñ d'ar skol-noz : 97.56.13.59. Titouroù e tenniñ d'ar Gerlenn : 97.57.67.71.

### Chapel-Nevez

Skol An Hanternoz ha Kreizenn Klasoù Glas Ar Chapel Nevez a ginnig deoc'h ur staj lonnuz war ar brezhoneg komzet gant an holl liveoù adalek al lun 25 betek ar Sul 31 a viz Here 1993. Graet e vo gant ar brezhoneg e-pad ar predoù hag an ehanoù ivez.

Ar staj-mañ a c'hell bezañ kemeret en karg gant ar stummadur dibaouez evit ar gopridi hag ar "CESed". Pellgomzit d'an 96.21.60.31 evit kaout titouroù.

### Pont n Abbad

Kentelioù brezhoneg a vez e Pont-n-Abad, aozet gant ar gevredigezh "Emglev ar Vro Vigoudenn". E vit gouzout hiroc'h, pellgomz d'an 98.82.00.98.

### Sant Nazer

Kentelioù brezhoneg a vez e Sant Nazer, aozet gant Skol Diwan Sant Nazer. E vit gouzout hiroc'h, pellgomz d'an 40.61.97.02.

### Bro-Pariz

K.B.D.P. (Kelennerien war ar Brezhoneg en Deskadurezh Publik) a ginnig deoc'h stajoù "dibenn-sizhun" d'an 2 ha 3, 9 ha 10, 16 ha 17 a viz Here 1993. Dalc'het e vint e Skol-Veur Pariz VIII e Sant-Denez. Kentelioù digoust e liseoù ha skolioù -meur Bro Pariz : Skol-Veur Pariz III (19, rue des Bernardins, 5vet) ; Skol-Veur Pariz VII (Plasenn Jussieu, 5vet) ; Lise Voltaire (101, avenue de la République, 11vet) ; er bannlev : 91 Massy : Lise Vilgenis (80, Rue de Versailles) ; 92 Meudon : Lise Rabelais (rue Langrognet) ; 92 Nanterre : Lise Joliot-Curie (92, av. Joliot-Curie) ; 93 Saint-Denis : Skol-Veur Pariz VIII (2, rue de la Liberté) ; 93 Villemomble : Lise Clémenceau (130, avenue de Neuilly) ; 95 Enghien : Lise Enghien (80, avenue de la Ceinture)

An darn vuiañ eus ar c'hentelioù-se 'zo digor d'an holl, liseidi pe get Kevredigezhioù 'zo a vez aozet ganto ivez kentelioù-noz e Pariz, Versailles, Sartroville, Athis-Mons, Les Ulis ha Soaux.

Titouroù digant K.B.D.P. 74, avenue de Fouilleuse 92150 Suresnes plg. Tieri 47 72 31 63 Mai 43 02 27 98

### MALLUS :

#### KINNIG - LABOUR

**Evit skolañ Roparz Hemon (Ar Releg Kerhuon) evit distro-skol 1993 : ur c'helenner war ar jedonezh e brezhoneg (1/4 amzer).**

Kas ur CV ha lizher en em ginnig da : z/Diwan B.P. 156 29411 Landerne Cedex.

**DIWAN Landerne 'zo o klask war-lerc'h un Implijad(ez) C.E.S. brezhoneger(ez) evit ul labour sekretourlezh (skriverezañ).**

Kas ur CV ha lizher en em ginnig da : z/Diwan B.P. 156 29411 Landerne Cedex.

## Klaoustre

# Da c'hortoz ur pemdezieg brezhonek LIAMMAÑ AN EMSAV HAG AN ARMERZH

gant Gwenaél KARADEC

Krouiñ ur pemdezieg e Brezhoneg, sed aze ar soñj a oa deuet d'un toullad studierien eus Skol an Emsav hag eus Skol veur Roazhon.

Ha setu int oc'h ober ur studiadenn-varc'had. Kregiñ a rejont ganti da geñver Gouel ar Brezhoneg e miz Mae 1993. Abaoe miziu e ta e talc'h ar studiadenn da vont ha dielfennet e vez tamm ha tamm gant ar studierien.



Thibaud ha Corinne en o burev nevez


### Bezañ distag

Evit sevel ur pemdezieg e ranker kaout binvioù. Faotañ a ra d'hor studierien bezañ distag. Distag diouzh pep strollad, pe politikel, pe sevenadurel, pe armerzhel, pe sokial a ve. Ha setu deuet ar soñj da grouiñ un ti-moullañ. Soñjal a ra dezho tizhout an emrenerzh dre sevel frammoù armerzhel kreñv. Komprenet o deus en deus al labour a youl vat ha nann gopret harzoù. Evit bezañ emren ha distag e ranker kaout argant. N'eo ket gant ur pemdezieg brezhonek e vo graet, da gentañ atav. An ti-moullañ a servijo da gentañ da sevel traoù all ha d'ober gounid. An hanter eus ar gounid az aio da grouiñ ur pemdezieg, an hanter all da skoazellañ raktresoù e liamm gant an emsav. Ha Setu kavet argant da brenañ an ti-moullañ hag ar binvioù. Un embregerezh S.A.R.L. zo bet krouet hag a implijo diouzhtu tri den gant ar soñj implij un all a-benn tri bloaz. Ne labourer ket gant an emsav hepken, pratikoù all a vo degemeret ivez eveljust. Daou vevanik zo bet prenet, dreist evit kartennoù embann, traktoù, teuliadoù, skritelloù, kazelennoù, kelaouennoù. Ne vo ket savet levrioù ganto.

### O c'hortoz an emsav

Embann a ra pennoù an embregerezh e voizel ha dedennus ar prizioù. Ouzhpenn-se e vo adpostet ar gounidoù an emsav. Liammañ an emsav hag an armerzh, setu o soñj. Kroget a vo ganto d'ar pevar a viz Here 1993. Labour o deus kavet dija hep o deus da gaout labour gant an emsav. O

c'hortoz emaint. Graet o deus tro an emsav evit kinnig o raktres. Digredik e voe an dud da gentañ, dedennet da c'hortoz evit al lod brasañ. Ma rit war-dro ur gazetenn, skritelloù, h.a., e c'hellit mont e darempred ganto. Ur rakpriz a vo roet deoc'h kerent, un taol esae a c'hell bezañ graet ivez. Darempred gant Corinne PRADIER ha Thibaud ETORRE, plg. 99 36 39 79, plr. 99 63 32 43.



# DISTRO-SKOL GWENGOLO 93 MUIOC'H A VREZHONEG ER SKOLIOU



E skolaj Diwan Roparz Hemon e Brest

Tremen 1000 bugel zo bremañ e skolioù brezhonek Diwan ; 1099 evit bezañ resis, e skolioù pemp departamant hor bro. Hag e klasoù divyezhek ar skolioù Stad pe ar skolioù kristen ez eus war-dro 1000 skoliad. Diwar ar 625.000 bugel zo e skolioù Breizh ez eus en holl war-dro 2100 a vez graet skol vrezhonek dezho eta.

### Diwan

E skolioù Diwan ez a niver ar vugale war-raok eus 18% ar bloaz-mañ, gant ar c'hresk brasañ e skolaj Roparz Hemon en deus 119 skoliad er Releg-Kerhuon, muioc'h eget e meur a skolaj all eus departamant Penn-ar-Bed. Er bloaz a zeu ne gresko ket mui niver skolañidi ar Releg, dre ma vo digoret ur skolaj Diwan all e Plijidi, e Bro-Dreger, hag anv zo da grouñ skolañidi all c'hoazh e Bro-Gernev hag e Breizh-Uhel. E meur a skol (skol-vamm + kentañ derez) e vo tizhet an niver a 100 bugel ar bloaz-mañ. Ha koulskoude, en abeg d'an diaesterioù armerzhel zo gant Diwan, n'eus bet digoret skol nevez ebet (e Plabenneg e oa prest an dud avat), ha n'eus ket bet krouet kalz klasoù nevez (pemp hepken e Landerne, an Oriant, Baod, Sant Nazer ha Naoned).

### Stad

Er skolioù Stad n'eus bet krouet klasoù divyezhek nevez nemet e daou lec'h : e Sarzhav, ur c'hlas gortozet abaoe bloavezhioù, hag e Plozeur, er Vro Vigoudenn. Hag e lec'hioù all, evel e Lannuon, Roazon pe Douarnenez, eo bet astennet rouedad ar c'hlasoù-se, e skolioù

a ginnige ar seurt kelennerzh dija. Ma'z eus klasoù divyezhek e skolioù Stad eus pevar departamant Akademiezh Roazon, e c'haller merzout n'eus hini ebet e Liger-Atlantel, ha n'eur ket prest moarvat da welet hevelep burzhud. En departamant-se n'eo ket bet gouest pennañderezhioù an Akademiezh da lakaat un den war ar post kelenner brezhoneg zo en em gavet vak ar bloaz-mañ e skolañidi ha liseoù kornog Bro-Naoned, dre m'eo aet kuit ar c'helenner a oa warlene. En holl ez eus bremañ 772 bugel skoliataet en hentoù divyezhek-se. Evit ar wech kentañ abaoe bloavezhioù n'eus ket bet re a gudennoù : e Brec'h e vank un hanter-bost hag e Rostren eo bet nac'het digeriñ ur c'hlas ouzhpenn er skol-vamm, daoust d'an 37 a vugale enskrivet. Araokadennoù e-keñver ar bloavezhioù tremenet ma nac'he an ensellerien akademiezh digeriñ klasoù nevez. Merzomp ivez eo bet anvet Jean-Do Robin da guzulier pedagogel evit ar brezhoneg en Aodoù-an-Hanternoz, e plas Claude an Du, aet war he leve.

### Katolik

E skolioù katolik Breizh-Izel ez eus bet krouet klasoù divyezhek ivez : klasoù nevez e Gwengamp, Kaodan hag ar


Faoued, ha klasoù ouzhpenn e Plabenneg ha Kleder. Evit a sell kelenn ar brezhoneg er skolioù eil derez avat, n'ez a ket kaer an traoù : 880 bugel hepken o doa bet kentelioù brezhoneg warlene, an hanter anezho e Penn-ar-Bed ■

I. Kadorec

### EMGLEV BREIZH

Armand KRAVEL, sekretour "Emglev Breizh" ha sekretour "Emglev evit Lezenn ar Yezhoù", en deus kaset deomp ur gemennadenn a zegas da soñj ez eus bet mouezhiet mennadoù evit ma vo ul lezenn evit ar brezhoneg ha yezhoù all ar C'hwech'horn gant 519 kuzul-kêr eus Breizh-Izel ha 107 kuzul-kêr eus Breizh-Uhel. E Penn-ar-Bed e konter 281 gumun diwar 283 a-du gant ur seurt lezenn (99,29%), e lodenn vrezhonek Aodoù-an-Arvor ez eus 137 kumun a-du diwar 172 (79,65%) hag e lodenn vrezhonek ar Morbihan 101 diwar 125 (80,8%). Votet ez eus bet hevelep mennadoù ivez gant ar pemp kuzul departamant eus Breizh, hag ar C'huzul Rannbarzh ■

# Gevelliezh Sant-Brieg Aberystwyth LIESAAT AN ESKEMMOÙ



Evit lidañ 20vet deiz-ha-bloaz C'hevelerzh Sant-Brieg gant Aberystwyth e oa deuet kannaded eus Kembre da welet Sant-briegiz eus ar 17vet d'an 19vet a viz Gwengolo. Raktresoù nevez a oa da zivizout war o fenn.

D'ar Sadorn vintin e voe al lidadeg ofisiel e ti-kêr Sant-Brieg. Ar c'hinkladur a roe ton an abadenn : banniel ar Stad c'hall e-unan ouzh talbenn an ti, banniel Kembre ouzh moger ar sal e-tal ardevez kêr Sant-Brieg, banniel Breizh dizispak en ur c'horn eus ar sal. E-pad tri c'hardeurvezh e voe tu da seliaou prezegennoù Klaoda Saunier, Aotrou maer Sant-Brieg, ha maer Aberystwyth, e galleg hag e saozneg, hag en devoe tro an unan da glevet an Ao. Saunier komz eus orin keltiek hon div gêr ; maer kêr Aberystwyth a gomzas-en eus hon div vroad. Goude-se e voe lennet e kembraeg hag e brezhoneg - "un arouez" eme Klaoda Saunier - disklêriadur ar c'hevelliezh.

### An Imbourc'h

6 000 eskemm a zo bet abaoe sinadur ar gevrat gevellin, e miz Ebrel 1973. Goude ar c'hoarierien mell-droad - Ar re gentañ da dreuzañ mor Breizh abaoe - e voe tro ar c'hoarierien rugbi, an neulierien hag ar skolid. Bremañ avat e fell d'an div gêr liesaat an darempredoù war-du ar skolioù-meur, an imbourc'h hag ar c'hevelerzh etre kumunioù all departamant Aodoù-an-Arvor ha distrikt Ceredigion. Evit ar skolioù-meur ez eus, end-eeun, liammoù etre an University college en Aberystwyth, 5000 studier ermi, ha skourr Skol-Veur Roazon I e Sant-Brieg. Evit an imbourc'h ez eus ivez darempredoù etre Kêr al Loened e Ploerfragan, e-lec'h ma labourer war yec'hed al loened, hag an Institute of Environmental and Grassland Research, a bled gant ar plant. Salv ma vo frouezhus al ledanaat-se war dachenn hor sevenadurioù broadel ha war stuzegzh Kelt an dud ivez avat. ■

Y.V. Thorel

### Breizh e Brusel e 1994

Burev Europa ar Yezhoù Nebaut Implijet zo e soñj sevel un devezh diwar-benn yezh ha sevenadur Breizh e Brusel er bloaz a zeu.

### Dilastezañ sevenadurel

Komzoù Jean-Michel BOUCHERON - n'eo ket an hini a zo en Arc'hantina o fardañ pizzaoù, met an depute PS-fabiuzek, ezel eus kuzul-kêr Roazon, e-lec'h ma taol plusk-bananez dindan treid Edmond HERVE- en ur vodadeg etre kuzulierien : «Je suis pour la régression du breton». Ha gwir eo emañ Radovan Boucheronic o vont d'ober ur staj e Serbia ? ■

P.O.

### Xivet Raktres ar Rannbarzh

Ur vodadeg a zo bet graet gant ar C'huzul Arboellerezh ha Kevredigezhel evit studiañ ar Raktres kinniget gant ar C'huzul Rannvro. Goude studiañ ar Raktres ha displegañ ne oa meneg ebet e nep lec'h eus kelennerzh ar brezhoneg hag ar sevenadur breizhañ, en deus lavaret Per DENEZ kement-mañ : "Setu ar gouleñn a ran, eeun-hag-eeun : petra soñjal eus ar Raktres-Rannvro, ha na daol ket an disterañ preder ouz ar pezh a ra diazez hor c'hudennoù sevenadurel : an diorroadur, dre an deskadurezh, eus ar yezh a-ziforc'h a zo gant hor bro-ni ?" Gwir ! War beseurt tachenn e ranko bezañ kaset ar stourm 'ta evit ma vimp doujet ha klivet ? ■

### Breizh-Uhel

Deskit gallaoueg gant Bertaeyn Galeiz, a-drugarez d'ar c'hentelioù-noz nevez... E-kerzh ar bloavezh skol 1993-1994 e c'helloc'h heuliañ kentelioù gallaoueg gant Bertaeyn Galeiz, e kreiz-kêr Roazon. En un ober bloaz e teskoc'h an diazezoù ret evit kaozael hag evit lenn ha skrivañ ar skrivadur skoueriekaat. Saveteñ ha kas war-raok ar gallaoueg emañ Bertaeyn Galeiz o klask ober. Unan eus div yezh Breizh eo ar gallaoueg, an hini roman. Evel ar brezhoneg en deus bet da c'houzañv tonkadur "trefodachoù" Bro-C'hall. Harpañ ar glad yezhel-mañ hag e implij gant ar boblañs, koulz war ar maez hag e kêr, ober eus ar gallaoueg ur yezh he defe ar gwir da vevañ hiziv, sed aze kefridi Bertaeyn Galeiz.

Bertaeyn Galeiz, 16 Straed Penhoët  
35065 Roazon Cedex, pellgomz 99 79 59 78

Gouel an Erminig  
4 DEN ENORET



A-gleiz da zehou : Ann-Vari ARZUR, Henri CADOUSSIN, merch Yann POILVET ha merch Jean TRICOIRE (deuet d'ar gouel e anv o zad)

Gouel an Erminig a zo bet lidet e Dinan d'ar Sadorn 25 a viz Gwengolo : seizvet lid an Erminig, a-benn enoriñ 'tud o deus servijet Breizh, ha dreist-holl e sevenadur'. Ar bloaz-mañ eo aet ar c'hulier arc'hant gant Anna Vari ARZUR, krouerez Skolig al Louarn e 1982 ; Herry CADOUSSIN, saver filmoù,

oberennoù lennegel, pezhioù-c'hoari, abadennoù skingomz evit ar vugale ; Yann POILVET, kazetenner («Armor Magazine»), skrivagner, drouiz ha Jean TRICOIRE, bet prezidant Emgleo Breiz, dastumer kanaouennoù ha korolloù ar vro, ha saver un hentenn-zeskñ brezhoneg. ■

Filmaoeg Breizh e Brest

Dibabet o deus izili kuzul-merañ "Filmaoeg Breizh" mont d'en em staliañ e Brest, e Ti ar Sevenadur. Pevar bloaz zo e oa bet krouet "Filmaoeg Breizh" evit dastum hag ober war-dro filmoù kozh a denn d'hor bro. Re enk e oa deuet da vezañ ar burevioù a oa ganto e Plerin, e Levraoeg Departamant Aodoù-an-Arvor. Ha klasket o deus renerien ar Filmaoeg ul lec'h all d'en em ziazezañ. Brest an hini zo bet dibabet ganto, dre ma veze kinniget kalz a blas dezho gant an Ti-Kêr, e diabarzh ar c'h-Quartz, ur savadur kêr gouestlet d'ar sevenadur. En nevez-amzer 1994 e levio Filmaoeg Breizh d'en em staliañ e kreiz kêr Brest.

Ti ar Brezhoneg e Pariz

Ma ho peus c'hoant lakaat e pleustr pezh ho po desket er c'hentelioù, kit ta d'ober un tamm tro e ti ar Brezhoneg, ul lec'h-kejañ evit ar vrezhonegerien ampart pe get. Kavout a reoc'h e-barzh ur bar, ul levraoeg, peadra da selaou sonerezh ha da welout abadennoù "Chadenn ar Vro" hag evel-just, plijadur e-leizh oc'h ober gant ar yezh. Digor e vez T.A.B. d'ar gwener noz adalek 7 eur 30 hag alies a-walc'h e vez prezegennoù, pe traoù all, d'ar sadorn goude kreisteiz. Ti ar Brezhoneg 15, rue des Tourelles 75020 Pariz (metro : Porte des Lilas) Pgz : 43 64 63 33

Taol-pluenn

Gant ar vezh !  
Un niver Bretoned vat, broadelourien en o zouez, a zo aet da gemer perzh e lid an Erminig, e Dinan. Ur prof, kaer eveljust, a oa bet prometet da gement hini a zeufe da ziskouez ar gartennig-kouviñ en doa bet. D'ar gartennig-kouviñ en doa bet. D'ar gêr ez eas an dud, evurus-bras, ganto ar mell boest hir a oa enni ar gartennig. Ur souezhadenn, gwas-hoc'h, un urusadenn, pa voe taolet ur sell war Gartenn Tud Veur Breizh : en o zouez e oa Du Guesclin ! Bremañ, e Breizh, e vez enoret an dreitourien war a seblant. N'ouzer ket piv, e Skol-Uhel ar Vro, en deus dibabet lakaat penn an treitour war an daolenn a enor : diase eo kredañ e vije bet graet an dibab gant Per DENEZ, Padrig MALRIEU, Gwenole AR MENN, Per LOQUET hag all ... Petra 'vo graet ganto bremañ ? Ha petra o deus soñjet implijidi Skol-Uhel ar Vro, pa 'z int bet rediet da reiñ d'an dud un dra hag a oa ur fasad e-kreiz o fri evit kalz anezhe ? Kroget eo an dud da gas ar c'hartennoù en-dro, barennet warno penn Du Guesclin, ha plegiet etre pevar, eizh pe dek, da Skol-Uhel ar Vro (74F str. Pariz, BP 3166, 35031 Roazhon Cedex). Lod all, a gav re uhel priz an timbroù, a droc'h diwar ar gartenn penn an treitour hag a gas anezhañ, marc'hadmat, da Skol-Uhel ar Vro. Bez e chello ar vegerioù bezañ peget du-hont ouzh ar voger. ■  
M E Waheno

**KELAOUENN**  
Breizh gant ar minit!

Kelaoer berr  
Gouelioù ha festoù noz  
Stadoù, sonerezh, kerc'h brezhoneg  
Chomlec'hioù, telennoù a bap saout  
Levrioù nevez embannet  
Skol-Uhel ar Vro

Kelaoer  
e brezhoneg  
hag e galleg

Kelaoer d'emp  
09 07 69 12 faka 09 03 02 28

**3615 KELA**

«Sevel tud a-vern»

DAOU  
C'HANT  
VLOAZ'ZO

N'eus ket bet komzet kalz, er bloaz-mañ 1993, eus eil kantvloaziad krouidigezh ar servij-soudard daoust ma 'z eo unan eus ar "madoberoù" legadet dimp gant Dispac'h Bras Bro-C'hall pa voe ijinet, e 1793, ar "sevel-tud a-vern".



**ezennekaet e voe ar "sevel a-vern" pemp bloaz diwezhatoc'h** gant an dispac'h Jourdan Lezenn Jourdan) ha deuet eo an ijnadenn diaoulek-se da vezañ ar servij-soudard a ra brepred e reuz en Arvor Bro.

A-raok an Dispac'h n'anavezet nemet an armeoù ez oa tud a vicher gopraet hepken ouzh o ober, hervez pinvidigezh ar briñsed pe ar rouanez a baseo anezho. Paurlisañ ne veze ar brezelioù nemet krogadoù etre ar pennadurezhioù-se a glaske kreñvaat o danvez hag o galloud dre skrapat lorioù ha madoù gouest da greskiñ o leadra, hep derc'hel kont eus ar pezh a anver hiziv ar "broadoù". Rankout a rae ar boblañs gouzañv ar skrapadegoù hag ar mestaolioù a c'hoarvezze da heul an emgannoù e-lec'h ma legouezhent. Ar pennoù-bras eo enta a glaske eulanañ o rendaeloù dre vrezelioù ha na lazhent nemet nebeut a-walc'h a dud. Ar werin avat a veze gwazh eus darvoudoù ha ne gomprenne tra enno alies.

Gant ar servij-soudard e voe kemmet an traoù : pobloù a-bezh eo a voe lakaet d'en em zrañhañ ha d'en em lazhañ kenetrezo en anv sorc'hennoù ha "kolipeternoù" re, mar deo gwell ganeoc'h ar gerioù gresianek, en anv ideologiezhioù savet d'o broadad. Kentañ hini a reas e vad eus nerzh ha galloud ar sevel-soudard a-vern ha dre-ret e voe Napoleon gozh. Gant ar wazed niverus pourvezet dezhañ gant al lezenn nevez eo e c'hallas, evel an Ankou, kas dre Europa a-bezh an drailh hag an distruj. Ar broioù all da c'houde a reas diouzh skouer Vro-C'hall. Krouet e voe, en darnvuiañ eus Stadoù Europa (hag e-lec'h all ivez), an hevelep doare sevel-soudard hag an dra-se eo a voe kinek, pa' en em soñjer ervat, da lazhadegoù ouzhus an daou vrezel-bed diwezhañ pa ne ve ken. Daoust ha lorec'h a c'hell bezañ e Mab-den gant ar seurt emzistruj ? Ar bed-holl eo a zo bet gwazh eus ijnadenn an Dispac'h Bras. E Breizh, en tu-hont d'ar miliadoù a

wazed yaouank marvet er brezelioù diwezhañ abalamour d'ar servij-soudard endalc'hus, ez omp bet gwazh ivez eus un doare souchet da ober gantañ : aet eo ar "servij-se" d'un leuzlestr (melting pot) e-lec'h ma tispartier hon tud yaouank diouzh o c'henvroidi evit o meskañ gant paotred a lec'h all hag evit o divrezhonekaat. ■  
Jakoz Konan

**KAZETENNOU BREIZH**

**L'Avenir de la Bretagne**  
(POBL) 150L/bloaz  
BP 4103 - 22041 Saint-Brieg Cedex 2

**Combat Breton**  
(Emgann) 150L/bloaz  
BP 71 - 22202 Gwengamp Cedex

**Le Peuple Breton**  
(UDB) 160L/bloaz  
BP 301 - 22304 Lannuon Cedex

**Armor magazine**  
225L/bloaz  
Pont Sant Jakez  
BP 419 22404 Lambal Cedex

# Kendiviz KAS HOR YEZHOU WAR-RAOK GANT RAKTRESOU EKONOMIKEL

Kaer zo lavarout e vez kreñvaet an ekonomiezh gant ur sevenadur gwizienet mat, an diorren ekonomikel hag implij ar yezhoù a zo un tem ha n'eo ket bet studiet don. Eus an 23 betek ar 26 a viz Gwengolo e oa bodet e Bro-Gembre dileuridi eus Kembre, Breizh, Katalonia (rannvro Valencia), Iwerzhon, Euskadi, Galisia ha Friz.



Diskouezet o deus ar berzhidi kaout youl da gas an traoù war-raok

Ar pezh a oa dedennus en ur seurt kendiviz eo e oa bodet asambles enklaskerien, tud e karg eus politikerezh ar yezh ha frammoù hag a gas war-raok raktresou prevez. Pouezet ez eus bet war ar fed ez eo ret liammañ kriterioù boutin an ekonomiezh gant an diorren ekonomikel hag un doare nevez da sellout ouz ar yezh hag ar sevenadur, evel kriterioù pozitivel. An dud a vicher o labourat war dachenn ar sevenadur a zo en o c'harg soñjal e boazioù ekonomikel an dud, evit termeniñ an hent da zibab. Frammoù ekonomikel ha kemmoù sokio-yezhel Unan eus ar poentoù pouezus evit komz eus diorren ekonomikel ha yezhoù minorelaet a vez kavet o sellout pizh ouz implij ha stad ar yezh. An endroadur sokio-ekonomikel er bloavezhioù tremenet a ziskouez ez eo bet cheñchet al levezon er frammoù ekonomikel ha ret eo teurel kont eus se er raktresou liammet gant ar yezhoù. Bez' ez eus bet e gwirionez muioch a gemmoù sokial er rannvroioù e-pad 20 vloaz

(1960-80) eget e-pad puerrest ar c'hantved (an dud o kuitaat ar maezioù hag o tont da chom e kêr, al labouradegoù oc'h en em staliañ). Ar prosesus-se en deus roet un faol da implij hengounel ar yezhoù, ha muioch-mui a dud o deus graet an dibab da implij yezh ar Stad. Evit dont a-benn da lakaat an dud da adkavout implij o yezh e rank ar re-mañ bezañ plasat war dachenn marc'had al labour, er frammoù publik koulz hag er brevez. Da gentañ tout avat ez eo ret reiñ fiziñs en-dro d'an dud en o yezh hag aozañ bruderezh evit se, evit ma vo patroned an embregerezhioù fier eus o yezh kenkoulz hag al labourerien. Bodañ tud tro-dro da raktresou liesvoadel. Unan eus disoc'hoù kendiviz Kembre zo bet kroudidigezh bodadoù-labour tro-dro da raktresou pleustrek : touristelezh sevenadurel, implij ar yezhoù er bruderezh hag all. Un doare da lakaat an enklaskoù da servijout d'an holl ha da chom hep koll arc'hant, nerzh, energiezh. A.V.C.

# Hanternoz Katalonia UN DEN DIWAR ZAOU A GOMZ KATALANEG

Hervez disoc'hoù un enklask paeet gant ar Rannbarzh "Lengadoc-Rousilhonn" e vez komzet katalaneg gant un den diwar zaou en Hanternoz Katalonia. Ar wech kentañ e ve graet ur seurt enklask diwar-benn ar c'hatalaneg er Stad C'hall. Ha disoc'hoù mat a c'haller kavout ennañ evit a sell komz ha kompren ar yezh. Goulnataet e oa bet 500 den e-miz Meurzh 1993, gant ur stal tud a vicher, "Média Pluriel Méditerranée", eus Montpelhier. En o zouez e oa 63% a gompren ar c'hatalaneg ha 36% a responte ne gomprenent ket ar yezh-se. E-mesk ar re yaouankañ (eus 18 da 24 bloaz) ne oa nemet 28% a gompren yezh ar vro, pa oa 79% e-touez ar re goשא (muioch eget 65 bloaz). Ar re zo gouest da gomz katalaneg a ya d'ober 48,6% eus an dud, tra ma 'z eus 11,4% zo gouest da lavaret ur ger bennak ha 40% na c'hellont distagañ ger ebet. Er skolioù e tlefed kelenn katalaneg hervez 83,2% eus an dud goulnataet, tra ma n'eus nemet 16,8% zo a-enep kelenn ar yezh-se. Ar paneloù katalaneg zo deuet-mat ivez gant 70,4% eus ar re aterset. War dachenn al labour e soñj 62,2% anezho e c'hall gouzout katalaneg bezañ un dra vat. Abadennoù katalaneg ar skingomz a vez selaouet gant 36% eus an dud, ha re ar skinwel a vez sellet outo gant 49,6% anezho (TV3, skinwel ar c'hreisteiz, pe F3, hini an hanternoz). Pa c'houlenner digant an dud petra eo an ensavadurioù o c'hallio kas ar c'hatalaneg war-raok en dazont, e teu ar respontoù-mañ diganto : "Generalitat Katalonia ar C'hreisteiz" evit 32%, Kuzul Departamant "Pirineoù-ar-Reter" evit 31%, ar Rannbarzh Lengadoc-Rousilhonn evit 15%, Kumuniezh Europa evit 10% hag ar gouarnamant gall evit 2%... Embannet en deus Kuzul Meur "Pirineoù-ar-Reter" e talvezte ar soniadur-se dezhañ evit sevel ur politikerezh yezh evit an departamant. I. Kadored

# POLITIKEREZH-YEZH EUSKADI

E-miz Eost e vo embannet gant Gouarnamant Kumuniezh Emren Euskadi (ar gouarnamant a ren war teir eus ar seizh proviñs euskarat) stumm nevez e steufiv euskarekaat ar vro. Disoc'h kaozeadennoù etre an daou strollad politikel a zo er gouarnamant, ar P.N.V., Strollad Broadelour Euskadi, hag ar P.S.O.E, Strollad Sokialour Spagn eo ar steufiv-yezh-se. Adwelet eo bet an destenn anezhañ, ha nebeutoc'h e vo pouezet war ar c'hilask euskarekaat kargidi ar gouarnamant emren. Disoc'hoù ar politikerezh kaset war-raok abaoe 1989 n'int ket dreist : un drederenn eus ar gargidi a vez o teskiñ euskareg a zilez o c'hentelioù e-pad ar bloavezh-skol, 40% anezho a vez korbellet en arnodennoù. Diwar vremañ e vo roet muioch e amzer d'ar gargidi di-euskarek evit tizhout al live yezh rakis evit o fost, ha lod anezho ne vo ket goulnennet diganto deskiñ ar yezh. Daoust ma c'hall ar gouarnamant euskarat embann e ya an euskareg war-raok er skolioù (diwar an teir hentenn kelenn zo er Kumuniezh emren, e kresk muioch-mui bep bloaz niver ar vugale skoliet en hentenn euskarek, tra ma tigresek niver ar re zo en hentenn spagnolek ha ma chom stabil niver ar re zo en hentenn divyezhek), daoust ma c'hall lavaret ivez e oa bet dispignet 2290 peseta (98 lur gall) dra zen evit kas an euskareg war-raok e 1992, eo gwelet an divizoù nevez-se evel "ur c'hammed all war-gil" gant lod eus ar vrogourien. D'an hevelep mare e tiviz ar gouarnamant emren tennañ e skoziadennoù arc'hant digant ar skoziadigezh A.E.K. a gelen ar yezh d'an dud deuet, hag er mare-mañ ivez en deus divizet ar gouarnamant-se paouez da reiñ an disterañ gwenneg bruderezh d'ar gelaouenn bemdeziek euskarek nemeti, Egunkaria. Gwazhwelour e oa ar gelaouenn Enbata, embannet en Hanternoz Euskadi, pa tisklerie e-miz Eost "le temps joue contre l'euskara" ha "les fonctionnaires basques reçoivent de leur propre gouvernement un signal de renoncement". I.Kadored

# KUZULIADEG RANNVROEL AN ENDRO E BREIZH

O vridañ un ensavadur nevez savet ganti emañ ar Rannvro er mare-mañ : Kuzuliadeg Rannvroel an Endro e Breizh. Deuet ez eus er-maez un teul a ginnig ar Guzuliadeg-mañ, he c'hefridi hag he falioù. Kinnig a reomp deoc'h un alberzh anezhañ emañ da heul.

## N'heller ket tremen hep ober war e dro

Hollbouezus ez eo deuet da vezañ an endro evit aozerezh an liriad hag evit dioreroezh armerzh ar rannvro. Setu perak ech embann ar Rannvro emañ dezhi kendalc'her ha kreskiñ hec'h oberezh war un dachenn a vez prederiet muioch-mui a dud ganti. E-mesk an traoù a-bouez a vez meneget gant ar Rannvro e kaver :  
- Bezañ sur da gaout dour a-walc'h evit ezhommou Breizh hag ober a seurt ma vele dour mat ha n'eo ket dour saotret  
- Gwareziñ ha talvoudekaal ar glad naturel  
- Gwellaat endro pemdeziek an dud  
- Gwareziñ an aodoù ha bezañ mestr war diorridigezh an oberiant en arvor  
- Skoaziñ ar re a glask labourer ur greanterezh o tougiñ d'an natur  
- Kas war-raok hon armerzhioù hag an imbourc'hioù o tennañ d'an endro  
Setu perak ez eo bet savet en-ollisiel d'an 8 a viz Meurzh 1993, gant Kuzul Rannvro Breizh, an ensavadur nevez e anv Kuzuliadeg Rannvroel an Endro e Breizh.

## Ober kinnigou

Ul lec'h evit komz hag eskemm mennozhioù e vo ar Guzuliadeg. Enni e vo kavet diennidi hag an holl gweletien ocher war-dro gwareziñ ha talvoudekaal en endro e Breizh. Mestrez e chomo ar Rannvro avat war an holl zisentezioù a vo kemeret. Kadoriad ar C'huzul Rannvro an hini a vo e penn ar Guzuliadeg. Kavel e vo enni a-hend-all :  
- Izili dire wir all : Alain MADELIN ha Paul ANSELIN.  
- 12 kuzulier rannvro, anvet hervez pouez pep strollad politikel er vodadeg rannvroel : Ambrose GUELLEC, Henri-Jean LEBEAU, Jean Le LU, Adrien KERVELLA, Yvon BONNOT, Daniel BOUER, Pierre BOURGES, Marcel

ROGEMONT, Alain UGUEN, Jean SANQUER, Serge MORIN, Raymond BLANC  
- Yves MORVAN, Kadoriad ar C'huzul armerzhel ha sokial  
- Robert CARADEC, Kadoriad ar c'hengor niv. 4 er C'huzul armerzhel ha sokial, karget eus an endro.  
- Kadoridi kuzulioù departamant an Il-ha-Gwilen, ar Mor-Bihan, Penn-ar-Bed hag Aodoù-an-Arvor  
- Un dileuridi eus ar Stad er Rannvro  
- Ur c'huzul skiantel  
Er c'huzul skiantel-mañ e vo kavet : Paul TREHEN da gadoriad, Pierre RAINELLI (INRA) evit armerzh an endro, Didier Le MORVAN (Skol-Veur Breizh-Izel) evit Gwir an endro, Claude CHEVERRY (INRA/ENSAR) evit ar gounid dour, Paul TREHEN ha Jean-Claude LEFEUVRE (CNRS/Roazhon I o-daou) evit ekologiezh an douar, Paul TREGUER (CNRS/Skol-Veur Breizh-Izel) evit ekologiezh ar mor, Jean-Louis MAUVAIS (IFREMER Brest) evit ar vorouriezh fizikel, Jean-Pierre BRUN (CNRS/Roazhon I) evit an douarouriezh, Guy MARTIN (Skol Gimiezh Roazhon) evit ar gimiezh, René SEUX evit ar yezh hag an dour ha Marcel BERTRAND (CEMAGREF Roazhon) evit talvoudekaal frank al loened.  
Div wech ar bloaz e vo bodet ar Guzuliadeg. Emvodoù dreisordinal a c'hello bezañ dalc'het ivez ha bodadoù-labour o tennañ da dachennou resis evel an dour, al fastez, ar glad naturel ha re all choazh a vo savet ivez.  
A-bouez ed hep mar savidigezh ar Guzuliadeg-mañ. Ret e vo gwelet bremañ hag efedus e vo e gwirionez war an dachenn merket dezhi. War evezh e vo dileuridi ar c'hevredadoù mozael.  
Olier ar MOGN  
Evit gouzout hiroc'h : Kuzul Rannvro Breizh, Dileuridh an Endro, 3, Contour de la Motte, B.P. 3166 35031 Roazhon cedex, plg. 99 29 65 00, pllr. 99 29 65 18

# LA OPCION ASTURIANA



J. L. CARMONA pa oa bet o'n em ginnig da vaer e Xixon

# EMDROADUR AN EMSAV ASTURAT

Pennad-kaoz gant José Luis CARMONA GARCIA, ez Sekretour Meur "Unidá Nacionalista Asturiana"

1991 War-dro 3 % eus ar mouezhioù a voe dastumet war anv an unvaniezh-se ha diennet e voe eta Xuan Xosé SÁNCHEZ VICENTE, anavet evel skrivagner ha geriadourer er yezh asturek, da gannad e Parlamant Bro-Astur. Kement-se a ziskoueze e oa ur goullenn a-berzh ar gevredigezh hag e kroge hon mennozioù da vout degemeret mat. Met torret e voe dizale an emglev gant ar c'hannad en em zalc'has evel pa vije kannad ar PAS ha neket hini ar c'hennemsav. Adal ar mare-se bloaz war-lerc'h an diennadeg e voe klasket ganeomp, UNA, en em glevet gant strolladoù all, ha pa ne velenet ket broadelourien : sokialourien, komunourien Izquierda Unida... Ha neuze en UNA e voe daou savboent disheñvel o stourm an eil ouzh egile. Iod a felle dezha re ur politikerezh etirenkadel evel ar PAS, echuiñ gant an UNA ha sevel ur strollad all, tra ma felle da lod all, me en o zouesk, tud a gleiz achanomp, kendalc'her gant an UNA hag en em glevet gant strolladoù all. Ganeomp e voe an tu-kréñ. Met ar re all a sinas emglevioù hep kaout aote ar renezh hag a damallas doomp an diouer a zemakaliezhiad-barzh. E miz C'hwevrer 93 e choulennis diganto reñh o diez. Pevh a reont, o kemer an anv a "Liga Asturiana". Dipitet gant emdroadur an traou e rois me ivez ma dilez, asambles gant ar burev en e bezh.

**Gw.E. : Peseurt disoc'h zo bet en dilennadeg diwezhan, d'ar 6 a viz Mezheven ?**

J.L.C. : Gant ar PAS e voe tizhet war-dro 3 % eus ar mouezhioù, heñvel ouzh ar g/Coalicion eta. Al "Liga" ne ginnigas roll ebet a-benn ar fin. "Andecha Astur", ur strollad taeroc'h, evit a sell o c'homzou da vihanañ, a zastumas un 800 mouezh bennak hag ar c'hiz "Conceyu Independiente d'Asturies" ar c'hiz bennak nemetken. Hogen mar bez sellet ouzh bezañs ar vroadelourien e dilennadegoù ar Gumuniezh emren evel un dra reizh, eo disheñvel an traou en un dilennadeg-Stad. N'eo ket fall, neuze, an disoc'hoù-se evit ar PAS.

**Gw.E. : Hag an UNA bremañ ?**  
J.L.C. : Morgousket emañ. En amzer dazont

ez ay river mouezhioù ar PAS war greskiñ, moarvat, pezh zo un tammig dipitus evit ur broadelour a gleiz eveldon, avat.

**Gw.E. : Pet a dud zo er strolladoù broadelour ?**

J.L.C. : En "Andecha" n'eus ket ouzhpenn 30 ezel, 'm eus aon. Er c'h/Coalicion (PAS + UNA) ez eus bet betek 1500 den.

**Gw.E. : Peseurt emzalc'h hoc'h eus e-keñver ar yezh, an astureg ?**

J.L.C. : C.A. a choulenne un dezvad a yezh ofisiel evit an astureg war dermen etre. Ar pouez a lakaemp war ar c'heleñn ivez.

**Gw.E. : Peseurt yezh ?**

J.L.C. : Ar yezh standard, reishaet. Aet omp dreist d'an tabut-se bremañ. Skrivagnerien zo eus Kornôg ar vro a ra gant gerioù eus o c'homad hag a skriv "ll" gant daou bik dindan evit aroueziañ distagadur disheñvel "ll" eno (un doare "ts" pe "tch"). Bremañ avat e rankomp mont a-enep kastilhanekaat an astureg ha diwall da veskañ an div yezh.

**Gw.E. : Evit distreiñ d'ar politikerezh rik, penaos e welez an dilennadegoù da zont ?**

J.L.C. : Ar bloaz a zeu e tlenimp kannaded Parlamant Kumuniezh Europa. Diaes eo ijinañ ar PAS o'n em glevet gant Esquerra Republicana (Katalonia) pe BNG (Galsia), nebeutoc'h c'hoazh gant Herri Batasuna (Euskadi) evel just. N'ouier ket c'hoazh peseurt em-glevioù a vo graet, forzh penaos. Ar wezh diwezhañ e oa bet ur roll anvet "Tu-Kleiz ar Poblou", unan all "Europa ar Poblou", mui roll H.B., evit a sell ar vroadelourien a bep bro hag a bep seurt. Pouezsoc'h e vo evidomp, evit giv lavaret, an dilennadegoù-kêr ha Kumuniezh Emren a vo a-benn daou vloaz. Tu zo soñjal e kresko c'hoazh levezon ar PAS da-geñver ar mouezhiadegoù-se. ■

**Gw.E. : Trugarez dit, José Luis, ha chañs vat.**  
(Komzou dastumet e kastilhaneg ha troet e brezhoneg gant Gwenael Emelyanoff)

# Gwirvoud Egor Schengen NE DREMENER KET

Pelec'h emañ ar rederezh frank ken brudet gant emglevioù Maastricht ha Schengen ? Kalz tristoc'h eo ar pezh a c'hoarvez : tamm-ha-tamm e vez staliet an doareoù gwaskañ, ouzh an enbroidi hag ar repuidi pergen, e-skoaz ma vez lakaet harz war ar reolennoù o tennañ d'ar rederezh frank. An istor da heul zo da vezañ keñveriet ouzh an divizoù dalc'het e Frañs e-keñver enframman ur politikerezh enepstren er vonreizh.



Studieren ar sindikad DAZONT a oa aet da gemer perzh er manifestadeg

D'an 3 a Wangolo e oa loc'het kirri-boutin a Vreizh hag a Vro-C'hall, Versaillezh ha Pariz dreist-holl, o kas Gurded da Frankfurt, Alamagn, dezho da gemer perzh en eil Gouel Etrevroadel Kurdistan D'ar 4, da 8e e chom un hanter-kant a girri, un 2 800 a Gurded ha mignoned, a-sav e maitouterezh gall-alaman Sarrebrücken. Eno e vez miret ouzh ar c'hirri dont tre en Alamagn war zigarez n'eus ket a vizioloù gant ar Gurded, pa oa bet diogelez, tri miz a-raok gant an hevelep maitouteriezh, ne vefe ket a gudennou. Tremen a ra ar Gurded an harzoù war droad neuze, o stankañ ar gourhent E50. Hag ur mell sit-in o kregiñ, e-keit ma z'eus tud o klask en em glevout gant ministr diabarzh Soir. E-pad eurvezhoù e van sachet an traou, ar Gurded e-keit-se o stlakal o daouarn da vammier Breizh, laouen m'az int gant ar skoazell degaset dezho. Da 13e ez enka an traou: gourdrouz a ra polis Alamagn divodañ ar Gurded gant aezhennoù-daeraoñ. Terriñ a ra ar vanifesterion chadenn ar bolised ha kerzhadegiñ war-zu Frankfurt. Goude kerzhout pemp kilometrad ez asant ar polis plegañ hag e

c'houlenn ouzh ar c'hiz-tremen da gas ar Gurded da Frankfurt. Laos-bris eo ar Gurded o vezañ trechet war divizoù dreizh.

## Gwerzhañ armoù

Penaos o dije gallet an dekmiladoù a Gurded goullenn vizioloù da vont d'un devezh gouel e Frankfurt, pa oa bet tennet o zramen-hent digant lod gant pennadurezhioù Turkia ? A zo kroc'h, n'eus bet sellet marse gant ar valouteriezh ouzh paperioù ar Gurded. Anat e oa an emglev etre pennadurezhioù Alamagn ha Turkia: stanket e vez ur posti maitouterezh, hag unan hepken (war an harzoù all n'eus ket bet a gudennou), evit bezañ pardonet gant Turkia bezañ lezet aozañ ar Gouel, ha bezañ laos ouzh ar Gurded. Rak kevraloù gwerzhañ kirri-arsalh zo da wareziñ E 1992 e oa bet stanket an harzoù etre Suis hag Alamagn da-geñver ar Gouel kenañ. Da geñver manifestadeg ar Gurded e Bonn (Mezheven 1993, 120 000 a dud) ne oa bet c'hoarvezet netra a-seurt-se. Diouzh ar priantadoù "karantez vias" etre Bonn hag Ankara e vez an oberoù-se :

pa vez stlart an darempredoù, ne vez ket a gudennou, tamm ebet. Hervez an Ao Hasan, e karg eus Kevre Em-savioù Kurdistan e Frañs, "e sav Alamagn a-du gant ar politikerezh a sport renet gant stad Turkia e Kurdistan".

## Fichennaouiñ a yoc'h


War hent an distro eus ar Gouel eo bet harzet pep karr-boutin er maitouterezh gall, etre 1e ha 5e beure, ar re-mañ o skrivañ anv 2600 den hag an titouroù diwar o lennoù. Kement-se da ziskouez ar c'henlabour etre Pariz ha Bonn war kudenn an enbroidi e diabarzh Kumuniezh Europa, hag en Egor Schengen. Rankout a reer lavarout ivez ez eo bet rok, dispriuz, dichek ha tagus emzalc'h ar polis gall (PAF), pa oa manet dereat ha seven ar valouteriezh alaman. Edo ar C'hallaoued o klask lakaet reuz a-benn gallout herzel unan bennak. Setu ur gentel skouerius a-zivout "Europa ar rederezh frank", a vez torret hon divskouarn kement ganti. ■

Ronan al LOUARN



# LUNEDOU AR BRIÑSED

E miz Gwengolo hag Here e vo lidet pempvet kantved embannadur al levr kentañ en Naoned : "Lunedoù ar Brinsed". Diskouezet eo bet e mediaoueg ar gêr, d'an 18 ha 19 a viz Gwengolo, hag e-pad ur miz c'hoazh hon devo an tu da anavezout gwelloc'h e skrivagner, Jean Meschinot, barzh breizhat anezvezetañ e amzer.



"Ar werenn zehou a zo e anv "Evezh" ... Evezh divzremmek, ur plach yaouank eus un tu, ur c'hoziad en tu all : unan eus pevar vertuzoù pennañ harpet ouzh bez Duk Frañsez II, e liz-Veur Naoned eo ivez.

Ganet en ur familh tudjentil hep pinvidigezh e Monnières (Bro ar Gwiniennoù e Gevred Naoned) e 1420, e krog da labourat e servij Dukad Breizh da 22 vloaz, hag e chomo feal dezho betek e varv. En o c'hichen e stourmo a-enep ar Saozon kent ar C'hallaoued. Met brudet eo da gentañ evit bezhañ barzh ofisiel al lez adalek 1461. D'ar c'houlz-se en deus Jean Meschinot echuet e bennoberenn "Lunedoù ar Brinsed". El levr-se, leun a zic'hoanag, e klask an arzour ster ar vuhez, perag ar marv hag ar boan. En em ginnig a ra ur vaouez dirazañ, a vez graet "Poell" diouti, evit sklaeraat e breder. A-benn e sikour evit diluziañ levr bras ar vuhez, e prof dezhañ ur re lunedoù, Ar werenn zehou a zo e anv "Evezh", an hini gleiz "Justis". Kelc'hiet int gant an "Nerzh" ha kenstaget gant an "Dislontegzh".

Anvet int "Lunedoù ar Brinsed", ket "e teufes da vezañ priñs pe aotrou-meur ganie" a lavar Poell met "peogwir eo bet roet gant Doue da bep den ar galloud da striañ e ene, a ra anezhañ ur priñs". Un oberenn tri mil gwerzhenn eo "Lunedoù ar Brinsed", lec'h ma vez displeget enni hent ar salvidigezh, un

danvez boutin a-walc'h er Grenn-amzer. Dibabet e vo e 1493 gant Anna Breizh evit bout ar c'hentañ levr moulet e Naoned, gant Etienne Larcher. Advoulet e vo un tregont gwech bennak. Un druz e chom hiziv nemet nebeut a skouerennoù : unan a zo e Levraoueg-kêr Le Mans, e kornôg Bro-C'hall.

Un diskouezadeg diwar-benn buhez Jean Meschinot savet gant Skol-Uhel ar Vro a zo staliet e mediaoueg Naoned betek ar 16 a viz Here. Kêr c'hendik ar barzh, Monnières, a savo diouzh he zu ul lidadeg hag ur fest-noz, d'an 23 a viz Here. ■

Tangi MANACH (Diwar "Nantes Passion")

Bep daou viz lennit  
**AL LANV**

59 hent Kerdronioù Vihan  
29000 Kemper  
Koumanant bloaz : 130 lur  
Skoazell adalek 160 lur

# Les noms de famille les plus portés en Bretagne (5000 anv studiet)

gant Gwenole ar Menn, Embannet gant Coop Breizh. 255 p., 120 lur. Anavezet mat eo Gwenole ar Menn evit e labourioù war an anvioù-tud hag an anvioù-lec'h. O tisplegañ ster hag orin an anvioù familh eo bet, war ar skingomz da gentañ ha da c'houde er skinwel. Karget a enkaskoù er CNRS ez eo a-hend-all, hag unan eus gwellañ arbennigourien an danvez ez eo el. Diviet eo al levr a oa bet embannet gantañ e 1982 diwar-benn an anvioù-familh, Noms de famille bretons (1700 noms et variantes). Gantañ eo ivez e oa deuet er-maez Grand choix de prénoms bretons, a vez eñ advoulet ingal abaoe 1971.

El levr zo o paouez dont er-maez e vo kavet anvioù eus Breizh a-bezh, da lavaret eo anvioù a orin keltiek ha re all a orin romanek, germanek... Kinnig a ra an aozour displegañ an anvioù a vez kavet an alesañ ha pa vele e Landerne pe en Ankiniz.

Er bloavezhioù diwezhañ ez eus bet graet ul lamm war-raok gant ar studioù keltiek a-drugarez da skoazell an urzhiaerezh. Menegiñ a c'heller labourioù Jean-Yves Le Moing pe Erwan Vallerie da skouer. Gwenole ar Menn a zo ivez unan eus ar re gentañ o deus gouezet tennañ spleit diouzh an ardivinkoù nevez-mañ. Diazezet en deus reolennoù labour nevez ha kavet e vo o frouezh el levr-mañ. En un doare sklaer hag helennel ez eo kinniget ar pennadoù. Evel-just e kaver ur meneger hag ul levrolladur el levr. Roet en deus deomp aze Gwenole ar Menn un oberenn leun a ouiziezh hag a c'hello bezañ implijet gant an holl, koulz an hini en deus c'hoant da c'hrouzout hiroc'h war anvioù e gerent hag an hini en devo c'hoant da vont pelloc'h gant studi diaes an anvioù tud. ■

Olier ar MOGN

# En tu all d'an douar ha d'an neñv

gant Per Denez. Mouladurioù Hor Yezh ; 109 p., 65 lur.

Danevell ur vuhez ordinal evel ma vez bepred : dichortoz, kevrinus, fentus, fromus... ha renet gant ar garantez, evel-just. Dont a ra bravoc'h choazh an istor-se gant ur yezh pinvidik ha skeudennus-tre. Peadra da dremen un nebeud eurvezhioù piljadur gant Per Denez. ■

Annaig RENAULT

# KANAÑ E FRANKEG

TuTTi  
FuTTi



Bremañ : "Stourm a rit abaoe bloavezhioù evit anaoudegezh ar yezh frankek. Perak emouestlañ evel-se evit un dra a seblant da lod bezañ ur gaoz kollet?"

J. NOUSSE : "Ar frankek n'eo ket un abeg da stourm, met ur gwirvoud : 350 000 den a gomz Platt (pe frankek) e Bro vMozel. Ur gwirvoud eo ivez e Koblenz, Köln, Trier, Saarbrücken, Arel ha Luksembourg. Komzet e vez frankek gant milionoù a dud e-kreiz Europa, dindan meur a stumm : rannyezhoù Luksembourg, Mozel, Bro-Rein... N'eo ket ur gaoz kollet eta, dre ma vez komzet c'hoazh! Ur yezh kozh-kenañ eo ar "Platt", disheñvel diouzh an alamaneg, ha komzet e veze gant Klovis ha Karl-Veur. Er Stad-C'hall emañ hor yezh en arvar, rak n'he deus gwir ebet : tamm plas ebet er skol, er skingomz, er skinwel, er c'hazelennoù... a embann koulskoude bezañ eus ar vro! Hor yezh rannvroel a dremen dreist d'an harz hag a ro tu da geodedourien peder stad (Gal, Alamagn, Belgia, Luksembourg) d'en em gompren hep kudennoù a vroadelouriezh."

Bremañ : "Evel kaner, soner ha barzh (c'hw' eo pennsoner ar strollad Tutti Futti), e vezit a lies o seniñ evit difenn ar minorelezhioù. Daoust ha ret eo difenn anezho, hervezoc'h?"

J. NOUSSE : "Gant Tutti Futti ez eus bet dija ouzhpenn kant abadenn, hag un drederenn anezho e broioù estren. Anavezet eo Tutti Futti peogwir e sonomp rock e Platt dreist-holl, met mennozhioù hor strollad a ya pell en lu-hont d'an dra-se. Hogen difenn ar Platt n'eo ket evidomp tremen dirak sevenadurioù all hep gwelout anezho. Ur meilh-dorn savet n'eo ket, met kentoc'h un dorn digor astennet! "Trans Eurock Express", hon abadenn a hiriv, a daolenn ar rock en un dek bennak a yezhoù.

# Tonioù Bastian ar Soner

Herve ar C'hamm zo un den feal. Feal d'e yezh kentañ, ar brezhoneg, daoust dezhañ bout ganet ha desavet en Angers. Feal d'e hendadoù ivez, p'emañ o paouez lakaat embann ur bladenn arc'hant (CD) da enoriñ e dad-kozh, anezhañ talabarder eus Plouie, anavezet evel Bastian ar soner. Paolig Montjarret oa aet da gaout Sebastian ar C'hamm da notenniñ sonerezh e donioù. Embannet oa bet an disoc'h gant B.A.S. en dastumadenn "Tonioù Breizh Izel". Herve, mab-bihan da vBastian en deus goulet digant daou eus gwellañ sonerien Breizh enrollañ an tonioù-se. Tonioù-dans, tonioù-bale ha kerzennoù zo war ar c'haer a bladenn-se a rankit prenañ ar buanañ 'r gwellañ evit daou abeg da vhanañ : ar blijadur da glevet Kristian Anneix ha Yann Baron o seniñ tonioù eus ar re vrayañ hag un doare da skoazellañ. Diwan peogwir e ro roet ar gonidoù d'ar skolioù brezhoneg. ■

E gwerzh er gwellañ staloù pe digant Kolch ar Vrotoned en Anjou. B.P. 21 49124 Saint-Barthélémy d'Anjou.

G.E

Bet omp oc'h ober un nebeut goulennoù ouzh Jo Nousse, zo barzh ha kaner er strollad Tutti-Futti, ur strollad eus Bro-Loren a gan e frankek. Emañ ar strollad sonerien-se o paouez lakaat ur bladenn arc'hant nevez war ar marc'had. Tro o deus bet da seniñ e Breizh e meur a lec'h dija (e Gwengamp, e Naoned, e Gwern, hag all).

Deuet e oa hon fladenn arc'hant er-maez e miz Mezheven, ha warni titloù en arabeg, e frankek, e galleg, e saozneg, en italianeg! "Chaovinellezh" ha "folklorac'h" na reomp foutre-kaer anezho. Pa vezomp o c'hoari e Kêrdiz, e Hamburg pe e Volmerange-les-Mines, e chom heñvel hor c'hennañ : etresevenadurel hag enep-gouerneleour!

Bremañ : "Gant ar gevredigezh "Wei laang nach?" hoc'h eus sinet ur galv evit ma vefe doujet Karta Europa ar Yezhoù Bihanniver gant ar Stad C'hall. Pennaos e soñj deoc'h e c'hellat bezañ kleve?"

J. NOUSSE : "Ar skrid-se war yezhoù rannvro ha bihanniver Europa zo un distenn a ziwall ar gwirioù yezh e pep hini eus ar stadoù a sin anezhañ. Bez' eo Bro-C'hall unan eus ar stadoù nemeto en Europa a nach sinañ anezhañ. Evel-just hon eus sinet ar galv-se a glask lakaat emzalc'h ar gouarnamant gall da cheñch. "Komite Mozel evit ar Frankek" (5 rue du Manège, 57100 Thionville) en deus dastumet dija harp kantadoù a dud e Bro-Loren, hag en o zouez Kuzul Departamant Mozel ha Kuzul Rannvro Bro-Loren. Nevez eo kement-se, rak betek-hen n'o deus ket an daou aozadur-se graet kalz a dra evit harpañ ar c'hevredigezhioù sevenadurel frankek. Ha sinañ a ralo Bro-C'hall? Nouzon ket re val. Evit ar poent e soñjan en abadennoù Tutti Futti a zeu, ha dreist-holl er C.D. ■

Diwar Le Top (Kelaouenn eus Metz), troet gant Gw. Adeux. Trans Eurock Express, pladenn Tutti Futti, a challes prenañ evit 115 lur frank digant "Réseau Rock Régions", 17 rue de la Perdrix, 57100 Diedenholen, Loren.



# Pladenn Alan STIVELL

Deuet ez eus er-maez ur bladenn nevez gant Alan Stivell. Titloù kozh eo e gwirionez a gaver war ar bladenn arc'hant-se, titloù kozh adkempennet, ha kanet en-dro gantañ gant sikour a bep seurt arzourien vrudet evel Kate Bush, Shane Mac Gowan, Laurent Voulzy, Dan ar Braz... Plijus a-walc'h eo ar pezh hon eus klevet ha gwellaet-kalz eo distagadur Stivell er stumm nevez eus "Son ar c'histr"... ■

I.K



# KAVET EO BET PALEZ AR ROUE MARC'H

N'eus ket tu da anavezout peurlvat istor Breizh, dreist-holl er Grennamzer uhelañ, hep bezañ kelaouet war istor ar broioù keltiek all d'an hevelep mare. An hevelep sevenadur e oa evel-just met ivez an hevelep tud a dremene digudenn eus eil tu Mor Breizh d'egile. N'eus hiziv tost nemet an imbours'herien war an istor evit heuliañ ar c'havadennoù diwezhañ diwar-benn ar mare-istorel-mañ, en daou du eus Mor Breizh.



Dor moer kastell Tintagel

## An tangwall e lanneier Tintagel

An diskoulm a c'hell bezañ roet gant un darvoud c'hoarvezet e 1983. Er bloavezhioù 1930 e oa bet kavet, e-pad furchadennoù hendraouriezh, darvoudoù niverus eus ar mare 450-650. Soñjet e oa bet en ur manati keltiek evit displegañ bezañs ar c'havadennoù-se. Met un tangwall a loskas lanneier ar gourenez o lakaat war-wel ur barn savadurioù bihan ha darvoudoù a-vil-vern eus ar Grennamzer uhelañ, hag an holl o tont eus ar broioù tro-dro d'ar mor Kreizdouare. Bez' e oa aze melloù jarloù eoul eus Tunizia, pladoù ruz-brav-tre eus Karthada hag eus Azia-vihanañ. Istri-gwin eus ar mor Egea ha re all bihanoc'h eus Buzantion. Kavet ez eus bet seurt traezoù emporzhiet e lec'h all e Breizh-Veur, met ar c'hementad traezoù kavet e Tintagel a zo brasoc'h eget sammad

an holl bet kavet e Breizh-Veur hag an Iwerzhon a-gevret. Mirout liammoù gant bed Roma a oa un doare da ganderch'el gant urzh kozh an Impalaerezh hag en doa roet galloudoù d'ur rummad brientinien deuet da vezañ keodediz Roma. Evit ar vrientinien-se deuet da vezañ roueed vihan goude fatidigezh Roma e oa ivez un doare da grefivaat ar galloud dalc'het ganto, int hag en em ginnige evel difennourien sevenadur Roma a-enep aloubidigezh ar varbared : Skoted, Pikted, Saozon, Angled, Juted hag all... Ar roue Marc'h, Marcus-Quononorius e anv latin, a oa keodedad roman ivez. Ar roue krefivañ e Kernev-Veur d'ar mare ma veze degaset ar poderezh brav kavet e Tintagel. Mestr e oa en Arvorig, e Kernev gozh ( Kernev-Veur + Devon) hag ivez moarvat e kreisteiz Bro-Gembre. Betek-henn avat e rae an istororien eus ur gêriadenn krefivañ, e-kichen

Castle-Dore (=Kastell-Douar e brezhoneg) etre Fawy (Fowey e saozneg) ha Lostwithiel, lez ar roue Marc'h.

Castle-Dore a oa bet da gentañ ur gêriadenn krefivañ daou c'hant vloaz a-raok J-K. Diezet da vare ar Romaned e oa bet annezet en-dro gant un "den meur" a lakaas sevel ur gwir palez e koad. Ur maen-koun savet nepell en deus lakaet an arbennigourien da soñjal e oa an den meur-mañ ar roue Marc'h dre ma lenner warni : "(DRUSTANS ?) HIC IACIT, CYNOWORI FILIUS", (Tristan ?) mab "Kinveur" a zo douaret amañ.

E testennoù koshañ mojenn Tristan hag Izold e oa Lancien bod ar roue Marc'h. Lantyan eo hiziv la tost-tre eus Castle-Dore.

Tintagel, ul lec'h kalz romanteloc'h, ne vije deuet da vezañ lez ar roue Marc'h nemet gant ar vrud degaset d'al lec'h dre oberenn Jaffrez Venoe. "Istor ar Vretoned", skrivet gantañ tro-dro d'ar bloaz 1145 a rae eus Tintagel lec'h ganedigezh ar roue Arzhur.

Ne gav ket din e c'heller diazezañ an istor nemet war an danvez lennegel. Ar fedoù hendraourel o deus kalz muioc'h a bouez.

Ret e vo adwelout hor menozioù war an istor hag al lennegezh. Daoust ma n'eus prouenn istorel ebet e seblant gwirheñvel a-walc'h ober ivez eus Tintagel bod ar roue Marc'h.

Betek diwezhat-tre er Grennamzer e oa boas ar vrientinien da bourmen eus kastell da gastell. Gwir e oa ivez evit ar roue Marc'h. Mont a rae moarvat eus Lancien-Castle Dore, da dTintagel ha da lec'h all hervez an ezhommoù.

Richarz diouzh e du en devije soñjet, awenet en ivez gant an hengoun, e c'helle degas brud dezhañ sevel ur c'hastell en ul lec'h ken pouezus e istor hag e lennegezh ar vro. ■

P. Lanoë

# LIDAÑ KOUN MARKIZ AR ROUERI

Gant "Komite ar Roueri" eo lidet ar bloaz-mañ daou c'hantvet deiz-ha-bloaz marv Markiz ar Roueri, ofiser e brezel dizalc'hidigezh ar Stadoù-Unanet ha krouer ar "Gevredigezh Vrezhon" da krouer ar "Gevredigezh kemeret" perzh e stourm dizalc'hidigezh Amerikaned ar Stadoù-Unanet e dibenn an 18vet kantved hag evit bezañ krouet ha bezañ renet ar "Gevredigezh Vrezhon" a glaskas emsevel enep ar galloud republikan gall e 1791-1793. Adsevel ar roueelezh ha difenn gwirioù Breizh e oa palioù ar Gevredigezh. Met c'hwiñañ a reas an emsavadeg, ha mervel a reas markiz ar Roueri d'an 30 a viz Genver 1793 e-kichen Lambal, ur pennadig a-raok na vo harzet ha lazhet renerien ar Gevredigezh.

Lidet e voe e goun d'ar sadorn 30 a viz Genver 93 e Sant Denwal, hag aozet e voe ur veaj istorel d'ar Stadoù-Unanet e miz Ebrel, "war roudoù markiz ar Roueri". D'ar 17 a viz Ebrel ivez e voe lidet koun ar Roueri gant ur bourmenadenn e Breizh-Uhel, dre al lec'hioù ma vevas ar markiz. Un delwenn zo bet savet ivez evit enoriñ ar markiz, lesanvet "ar jeneral Armañs" en arme an



emsavidi amerikan, un delwenn vras a vo staliet e-kichen an ti ma voe ganet, e Foujera, d'ar sul 17 a viz Here, hag un tamm lid a vo graet eno an devezh-se da 11 eur. Dre ma reas berzh ar veaj d'ar Stadoù-Unanet - 41 den o kemer perzh ennañ blienet gant an istorour Christian Bazin - eo bet divizet e ober en-dro etre an 19 hag ar 27 a viz Here 93 ar wech-mañ. ■

Evit gouzout hiroc'h e c'haller mont e datempred gant Kadorad Komita ar Roueri : Yann Bouessel du Bourg, Runargant, La Haie d'Idé, 35450 Val d'Idé.

I. KADORED

## Marv skrijus Yann-Vari Perrot 50vet deiz-ha-bloaz



Yann-Vari Perrot 1877 - 1943

D'ar Sul 12 a viz Kerzu 1943 e voe drouklazhet e Skrigneg an aotrou Yann-Vari Perrot ha d'an 13 ez eas d'an anaon. Drouklazhet e voe abalamour d'e feiz ha d'e garantez evit Breizh, barnet ma oa bet d'ar marv dre ma oa arouez vev an holl emsaverien dibleg.

Evit lidañ 50vet deiz-ha-bloaz marv skrijus ar merzhêr brezhon e-pad Unvaniezh Koad-Kev eo pedet an holl Vretoned d'an em gavout d'ar Sul 12 a viz Kerzu e Skrigneg ; da 11 eur dirak ar groaz ruz e-lec'h ma voe tizhet gant tenn ar marv ; ha da 3 eur (goude kreisteiz) e-tal chapel Koad-Kev e-lec'h ma voe beziet. Enoret e vo ivez war un dro an holl Vretoned marvet evit ar vro. ■

Unvaniezh Koad-Kev

Dudius !

### AN OALED

Roll stajoù "An Oaled" a zeuio er-maez prestik. Ma c'houlennit kaout ur skouerenn e vo kaset deoc'h evit netra.

A galon vat e vo degemeret gant An Oaled traoù kozh n'ho pefe ket ezhomm anezho ken : feltennou, kezeg-houarn, c'hoarielloù...

Emañ An Oaled o klask familhoù brezhonegerien prest da zegemer bugale pe tud deuet evit ur pennadig amzer, dezho da beurzeskiñ brezhoneg.

An Oaled, straed an Ti-Kêr, 29870 Treglonoù



Vakansoù ski 5-13/3/94

Staj ski evit krennarded 5-15 vloaz  
Ski diskenn pe ski bale, surf monski ouzhpenn er Savoie, e-kichen Aberville (Crest Voland a zo lec'hiet en "Espace Cristal" : 3000 km evit ar ski (ski diskenn : 100 km hentoù, ski bale : 100 km hentoù, 10 telesieges, 29 teleski).

2500 lur evit ar ski diskenn (-12 vloaz)  
2600 lur evit ar ski diskenn (12-18 vloaz)  
2700 lur evit ar ski diskenn (18 vloaz)  
2200 lur evit ar ski bale en holl.

Arsav e Treglonoù, Brest, Montroulez, Gwengamp, Sant-Brieg, Roazhon

An Oaled  
29870 Treglonoù  
98 04 07 04

**EVIT AR BREZHONEG**  
**EVIT AR BREZHONEG**  
**EVIT AR BREZHONEG**  
**EVIT AR BREZHONEG**

Kazetenn evit deskñ brezhoneg  
**B. P. 41 - 29870 Lanniliz**  
6 niverenn : 75 lur

### RADIO

#### Breizh e pariz

Tu zo da glevout brezhoneg hag abadennoù a bep seurt diwar-benn Breizh war Radio-Pays 93.1, bep gwener etre 3 eur ha 5 eur goude kreisteiz hag etre 9 eur ha Kreiznoz ; bep sadorn vintin etre 9e30 hag 11 eur. Ur studio nevez 'zo gant Radio-Pays abaoe penn-kentañ miz Gwengolo 67, rue Robespierre CAP 118 93558 Montreuil. Pgz : 48 59 22 12.

#### Radio Arvorig

Diwallit ! Cheñchet eo bet an abadenñ e brezhoneg (pennadoù-kaoz ha sonerezh e-leizh) ; bep Yaou war 103.1 mHz eus 19e15 da 21e15. Bep Sadorn etre kreisteiz ha 2e war gwagennoù-etre (711 kHz).

**4re Gouel al Levrioù e Breizh**  
30/31 a viz Here 93  
**KARAEZ**

**Kentañ saloñs liesyezhel al levrioù bugale e Breizh :**  
**KEMPER**  
11-12 a viz Kerzu 1993

Diwanet ez eus ur v-**"BLEVN'NENN"** vihan e liozh Ivona, Ehora, Marivon ha Gireg KONAN, e Perroz-Gireg, d'ar 17 a viz Mezheven.

Laouen eo ar c'hrouadur bihan o vevañ, ha krog eo da c'hrazañhat par ma c'hell.




Ur GARTENN-LIV gant holl gêrioù pennañ Breizh  
**TROIOU-LAVAR** evit pinvidikaat brezhoneg pep hini  
**KILOMETRADOU** etre kêrioù pennañ Breizh  
Penaos ober  
**CHEKENNOU** e brezhoneg  
Taolenn ar  
**CHEMMADURIOU**

Roll an holl **GEVREDADOU** hag **ENSAVADURIOU** o c'h ober war-dro **SEVENADUR BREIZH !**  
Mui ur c'harnedig evit ho chomlec'hioù gant, evit ar wech kentañ,  
**HOLL GODOU-POST** ha **STUMMOU BREZHONEK** anvioù komunioù Breizh  
*Petra eo ? Respont war niverenn a zeu Bremañ*

### GERIOU-KROAZIG

**Sant Mich BEYER**  
Gael niv. 9



- A-serzh hag a-led :
1. N'eo ket kromm.
  2. (a) gemere plijadur.
  3. Skouarneg bihan.
  4. En olaed e varvont.
  5. Labous.

Diskoumoù gael niverenn 8 :  
Kalet ; Alamo ; Lavar ; Emaer ; Torre.



### Alioù fur lipouzenn

Deuet eo mare ar c'histin. Anavezet-kaer int er vro met ouzhpenn o c'hrazañ en olaed a c'heller ober, ha setu 2 zoare saourus d'o fardañ.

#### TOAZ KISTIN

1 kg sukr ; 1 kg kistin flastret ; 1 l dour ; plusk ur suraval ; 1 glosennad vanilla ; sukr kristal

Sankit ur gontell lemm e pep frouezhenn. Goloit gant dour ha bervit e-pad ur chardeur. Dibluskit ha flastrit ar c'histin. Prientit ur siros gant an dour, ar sukr, ar vanilla ha plusk ar suraval. Skuilhit war ar c'histin flastret ha meskit mat. Poazhit e-pad ur c'hardeur. Gortozit ma vo disec'het un distañ ha ledit an toaz en ur plad hirgarrezek a-benn kaout ur gwiskad 1 cm a devden. Lezi da baourseññ, didrochit karnezioùigoù ha poultrennit gant ar sukr kristal.

#### KISTIN GANT LAMBIG

1 kg kistin ; 250 g sukr ; 1 wenennad dour ; 1 glosenn vanilla ; lambig.  
Sankit ho kontell er c'histin hag o lakait da boazhañ 10 munutenn an dour. Dibluskit ha lakait en ur pod gwer. Prientit ar siros gant an dour, ar sukr hag ar vanilla ha skuilhit war ar c'histin. Peurcholait ar frouezh gant Lambig.  
Stouvit ha lezit tri miziad da goshaat ☉

**FEST-DEIZ**  
**FEST-DEIZ AR MIZ KREIZENN SEVENADUREL "ROPARZ HEMON" (PLASENN VERDUX, GWENGAMP).**  
**A VO AOZET D'AN 31 A VIZ IHERE 1993, ADALEK 2E IANTER G.K.**

Skrivañ da **AL LIAMM**  
16 straed des Fours à Chaux  
35400 - **SANT MALO**

**Lennit al liamm**

Koumanant bloaz 150 lur (studierien, tud dilabour 100 lur)

### TAOLENN

BREMAÑ niv. 145  
miz Here 1993 - 20 pajenn

Kentelioù-noz (haur)	2
Un embregerezh nevez	3
Distro-skol	4
Berr ha Berr	5
Keleier Breizh	6
Arme	7
Kendiviz e Bro-Gembre	8
Endro Breizh	9
Emsav asturad	10
Egor Schengen	11
Etrevroadel	12/13
Levrioù nevez	14
Sonerezh	15
Istor	16/17
Dudi	18/19
Celtomania e Naoned	20

Pennadoù gant Gwenael CARADEC, Iwan KADORED, Herve KERRAIN, Gwenael EMELYANOFF, Jakez KONAN, A.V.C., Olier Ar MOGN, Ronan AL LOUARN, Y. Varc'h THOREL, Annaig RENAULT, P.D., P. LANGE, Gweltaz ADEUX, Hegareh, Mich BEYER, Tangi MANACH, M.E. WAHENO.

Skoazell difazañ gant Iwan KADORED, Doming JOLIVET, Herve KERRAIN.

Luc'hskeudennoù gant A.V.C., Philippe LANGE, Lena LOUARN.

Renerez BREMAÑ : Lena LOUARN

Skrivit e-barzh BREMAÑ ! Kasit danvez a-raok an 20 a viz Here (93 !)

Trugarez deoc'h.

Koumanant : 180 lur ar bloaz, skoazell : adalek 200 lur ar bloaz.

BREMAÑ,  
8 ru Hoche,  
35000 Roazhon, BREIZH

Niverenn CPPAP 62974

## Gouel Celtomania

# BREIZH E NAONED

Abaoe ar c'hentañ a viz Here eo krog gouel «Celtomania» e bro Naoned. Betek ar 14 eus ar miz e vo tro d'an Naonediz arvestiñ ouzh sonadegoù, pezhioù-c'hoari, diskouezadegoù, divizoù, ha deskiñ penaos bezañ breizhad hiziv e kêrbenn duked Breizh.

**P**empad Treujenn Gaol, triad E. Grandjean, E.V., STORVAN, D. Prigent : deuet eo a-benn aoza-dur «Celtomania» da bediñ lod eus arzourien wellañ Breizh a-hiziv, en ur ober hep ar "pennoù bras", e-giz Tri Yann pe Stivell. Lakaat Naonediz da zizoloiñ sonerezh (hag arzoù) Breizh, ar pezh na vez ket aes dezho ober e-pad peurrest ar bloaz, setu pal Christophe LELU, aozer eürus ar gouel. Evit ar pempvet gwech e kemero plas an div sizhunvezh-se e



bro Naoned, strewet ma 'z eo an abadennoù e bourc'hioù bihan tro-dro d'ar gêr vras : Orvez, Sant Ervlan, pe Sant-Sebastian-an-Enk. Digeriñ a ra ar gouel-se ar bloavezh sevenadurel e Naoned. Gant kevredad ar c'hêrioù tro-dro eo kalz aesoc'h d'an aozerien implij salioù (digoust ...) ha merañ ar gouel. Un doare-produiñ a zo bet

dibabet a zo ar c'henskignañ, ha lakaet eo bet dek kreizenn sevenadurel da labourat asambles. Skoazellet e vez ivez gant Kuzul-Meur al Liger-Atlantel, kêr Naoned ha Ministrerezh ar Sevenadur e Naoned. Gant ar rannvro "Peydeloar", n'eo ket, eveljust.

### Daou bost labour

C'hoant 'zo gant ar c'hengevredad sevenadurel breizhek e Naoned (DASTUM, kelc'hioù keltiek hag all ennañ) diorren ar gouel, betek ma yafe da ziazez evit ar vuhez vreizhat e Naoned : abadennoù a-hed ar bloaz a vefe tu da ziskouez e-giz-se. Dedennet eo ti-kêr Naoned gant ar raktres, dreist-holl ar guzulieren-kêr Yannick GUIN ha Jean-Louis JOS-SIC, ha marteze e vo savet daou bost-labour evit ober war-dro. An arc'hant a vefe pourvezet gant an ti-kêr hag an DRAC (Ministrerezh ar Sevenadur). Ha war an hir dermen e vefe savet ur wir kreizenn sevenadurel breizhat e Naoned. Pa vez lavaret da G. LELU e kasfe an diviz-se kêr Naoned kalz pelloc'h eget Roazhon war dachenn sevenadur Breizh, e respont «ez eus 0,09 dre gant eus budjet sevenadur kêr Naoned o vont gant hini Breizh (er-maez eus DIWAN Naoned : 0,64% eus budjet ar gêr evit ar skolioù prevez) hepken».

### War ar roll

Ha koulskoude e hañval da G. LELU ez eus ur c'hoant gant Naonediz e-keñver sevenadur Breizh. Leun a-walc'h e oa pep abadenn ar bloavezhioù a-raok. Jedet eo bet da 1000



niver ar plasoù bet gwerzhet e div sizhun warlene, evit abadennoù stallet e salioù bihan a-walc'h.

War ar roll ar bloaz-mañ e vez kavet sonadegoù a bep seurt, ur pezh-c'hoari, un nozvezh "pub", un davarnkoan vras-fest-noz (d'ar Sadorn 9, e Sant Sebastian), un diviz d'ar Meurzh 12 e Mediaoueg Naoned : «Penaos bezañ breizhad e Naoned d'an deiz a hiziv ?», gant G. SERVAT, kaner, G. ADEUX, soner, Y. GUIN, e-karg eus ar sevenadur e ti-kêr Naoned ha T. GUIDET, rener O.F. Naoned ; ur sonadeg gant Denez PRIGENT d'ar Yaou 14 e Sant Ervlan, hag un diskouezadeg eus ar 4 d'ar 16 a viz Here e Sant-Sebastian-an-Enk : «Skeudennoù ar Vretoned», eus Becassine da Job Lak-e-barzh. ■